

# KANTIK      LORETTA

Deredomp da bediñ      An itron Varia  
Kanomp holl meuleudi      Patronez Loreta

1. Na pet o deus kavet E chapel Loreta

Joa, o lavaret      An Ave Maria

1. Dezho, Gwerc'hez santel      Digorit ho kalon

En goudor ho skoazell      Roit proteksion

3. Ho ped soñj mad bepred      Ez int bugale Breizh

Ha n'o dilezit ket      E-touez an dud difeiz

4. Deus ar menez uhel      Ra gouezho, deiz ha noz

War ho parrez fidel      Ar glizh eus ho pennozh

5. Dalc'hit en hon touez      Feiz start hon tadoù kozh

Ma'z aimp holl asambles      D'ho kaout er baradoz